


Kantik Intron Varia Dremoren



VAR DON : *Intron Varia ar Porzou.*

DISKAN :

*Intron Varia Dremoren,
Klevit mouez ho pugale ;
Bezit aeo hör stereden ;
Hon diouallit noz ha de.*

Labourerien, martoloded
Da chapelik ar Verc'hiez,
Laouen omp hirio diredet
Da bedi hor Rouanez.

Evel eur bugelik bihan
'Red da gaout he vam dener,
En hon anken ni zeu buhan,
Mari, beteg hoc'h auter.

'Vel ar c'haro en e zec'hed
A glask dour an eienen,
Ni, pa ve poaniet hor spered,
D'eoc'h-hui a ra eur beden.

Aman oc'h dindan tri hano
Gant hon tadow bet pedet,
Hanoiou ken dous d'ar gend
Ha ganeomp kement karet !

Roit ho pennoz d'ar parkeier,
Evit ma vint frouezuz,
Ho pennoz ive d'hon tier
Ha bennoz ho mab Jezuz.

C'hui voar, Mari, ez eo c'huelo
D'al labourer kaout eost fall ;
Grit ma vo id mad en ero
Glebet gant c'huezen e dal.

Stereden ar mor oc'h hanvet,
Diouallit ar martolod,
Rag Jezuz en deuz he roet
D'hoc'h da zifenn 'vit ho lod.

Varnean, ebarz e vagik
Luskellet gant ar wagen,
Deuz an nenv tölit eur zellik,
Astennit ho torn d'he ren.

Kasit pell, Intron a Druez,
Ar goal amzer diouzomp ;
Amzer gaer 'vit ar beskeréz
Harz ho treid a c'houennomp.

Ra vo leun-tenn hor rouejou
Hag hor bag epad ar bla ;
Pa'n eus naon hor bugaligou,
Red eo rei d'ezo hara.

Guerc'hez Vari, ouzomp sellit
Pa zono kloc'h Tremoren,
Neuze buhan hor zikourit,
E vouez-gas d'eoc'h hor peden.

Kemennit éta d'an avel
Ha d'ar gurunou spontuz
Euc'h ar mor e kounar tevel ;
Ho preac'h zo oll-c'hallouduz.

Ni ya laouen e kreiz ar mor,
Pa velomp tour ho chapel ;
Neuze ni gan en hoc'h henor
Eur c'chantik gant an avel.

En danjer ha töst d'ar maro
Ni ho ped, ho ped kalet ;
Mar eo ho torn hon diouallo,
Biken ne vezimp kollet.

D'an denfall roit ar sklerijen,
Intron Varia 'r Sklerded ;
'Vit-se-dour feunteun Tremoren
Ganeoc'h zo bet benniget.

Ar Feiz hirio a dec'h buhan
Deuz hor bro ger Breiz-Izel ;
Eur vanden tud fall heb ehan
Ra d'ez ieur goal vrezel.

Grit ma vo stard evel guechall
Lezen Doue en hor c'hreiz ;
Heb d'ez i n'eus 'met noz tenval ;
Kaer eo sklerijen ar Feiz !

O Mari, o mam a Druez,
Mam a C'hraz hag a Sklerded,
Ebarz an nenv gant an elez
Roit d'comp oll an curusted.

N...

Imprimatur :

Quimper, le 6 Septembre 1927.

P. JONCOUR, V. g.